

KLOAREC KOAT AR RANNOU

A PENN-HERES KERSANTON

War don : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia-Remengol*

Karantez a glac'har !

1

Tud iouannq, a Vreiz-Izel distodait da glevet
Ar recit euz va daëliou ha va foaniou kalet :
Me zo eur c'hloarek iaouank a eskopi Quemper
Am boa choaset eur vestrez en eskopi Tréguer.

A c'haars ar mor oun ganet en bro sant Gwenole,
Ha biscoas nemet glac'har nem eus bed em bue ;
Glac'har a quir garantez setu ma flaneden.
Planeden rust a kalet da heuilla pen da ben.

Pa oan em bugaleac'h, va vam baour aliez
A lavaret din : « Va mab, var ar bed, ar Werc'hez
« Ped anezhi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,
« Mar e fedez a galon, biken ne ni da goll »

Patrones ma mam dener, Gwerc'vad Remengol,
Ped gweach oc'h euz hu miret da doun ma eat da goll
He pedet am eus bepred, breman araog mervel,
E kanin he meulodi d'am breudeur Breiz-Izel

Pa guimiadiz dioc'h va zud da ziz pell euz ar guer,
Evit mont var ar studi en kollach Landreguer,
M'em boa nemet pemzek vloa, me a wele dourek,
Rac evidon ne oa ken, alas !... a eureusdet !...

O tostaat oc'h Landreguer e kavis eur plac'hik :
Koant vel eun ælik Doue he hanno oa Metik ;
D'ar gouent a ze ive, doun d'ar studi,
He c'halonic oa mantret kement a va hini.

« Salud deoc'h plac'h iaouank a lavari dezhi,
« Evel d'oun oc'h onkeniet ho kuitat tud ho ti,
« Ho tornic flour em dornik laquet gant garantez,
« Hac vesimp eurussoc'h o wela assamblez. »

Ar plac'hit a lavaras ; « O cloarec Gwenole,
« Pedomp Doue alies an eil evit eguile
« Er joa kouls hag en anken d'alc'hit sonj a Vetik
« Euz a vremen da viken e o mestrezik

« — O Metik va c'harante, rozen ker Breiz-Izel !
« War ho mignon Gwenole tolet breman eur zel,
« Eur kell digant ho lagad a raï eurusted
« Keit a ma lezo Doue ac'hanan war ar bed. »

Eru en kaer Landreguer, erru e pen hon hent,
Me oe kasset d'ar golach, ha Metik d'ar gouent ;
An disparti oa kalet c'hue o hag ankeniuz,
An eurusdet er bed-man n'eo ket paduz !...

Dre ma chomiz er golach, skeuden dous Metik kez
Ean deiz, enn noz diaison he deue aliez
Neuze peden Doue ha zen kos Briez-Izel,
Vit ma vije en e bue, laouen evureuz zantel

11

Pa eo achut va studi en hiz d'a Remengol,
Da bedi c'hoas evit hi Gwerc'hez vad *Remed oll,*
Seiz tro a riz d'an noter, devez a pardoun bras,
Ha seiz tro d'an Illiz zarkr war ben ma zaouin noaz,

Goude an offeren bred, o pebeuz levenez !...
Er vered, gant e man ger, e velis Metik kez
Laoaen eo evel an deiz, ha coant evel al loar
Biscoaz pen-herez ken koant n'euz bet var an douar

Lugerni a re he zall, he diou chod gwen a ru,
He gueno vel eur rosen, he bleo, he lagad du,
Eur groaz aour en he c'herc'hen, e c'hoef dantelezet
Lavaret vije eun æll euz an êv diskennet.

« O pebeus joa evidomp va c'hloarec Gwenole,
« En em gaouten Remengol deis pardon mam Doue
« Mam ea oll dud ankeniet, Gwenole ma mignon,
« Evidom e pep amzer he fediz a galon.

« — Metik koant, setu aman, eur voalen aour,
« A roas din araog mervel, Anaik va mam baour,
« Doug anezi var da viz, kemer hi digan en,
« Me dou war goaled ma mam d'ez karet da viken

« — Ar groas aour zo em c'herc'hen a vo dit Gwenole
« Eur guchen euz va bleo a roan did ive ;
« War ar groas e truan a dirag ar Werc'hes
« E vi karet aant Metik, tre ma vo en bue. »

Ha daoulinet en ilis, hon deuz gred eur beden,
A roet evit efrans, eur c'hoaris koar melen,
Béniguet ho meladen, poket da relegou,
Da relegou Sant-Briez karet gant ho tadou.

Goude hoe euz baleet hon daou da Breiz-Izel,
Ho gwelet kalz ilizou ; kalz a dourio huel,
Abatti Landevennec, ha mor Douarnenez,
Lec'h ma oa Ker-Is hag or princes Athez.

Gwelet hon euz Mene-Hom, hag illiz veur Qemper
Mene-bre, illiz Bulat hag hini Landreguer,
Kastel-Brest, Rant-Ian ar Bis, illiz Salaün-ar-Foll
A kaera tour zo er bed, tour huel Kastel Pol

Gwelet hon euz Ker-Ahès, Kemperlé, Pon n'Abat,
Fouenan, bro ar merc'het koant, Guengamp hag Huelgoad
Môntroulez a Lan Huon, Krosson a Les-n'Even,
Kallac, Bro ar gourino, Kastel-Lin, Rosporden.

Klevet hon euz e krosal a mor beg a Raz,
Biscoaz den naentremanaz eb santout aon pe c'hlas,
Bet omp en ene Sinun, en Roueseaz Molenez,
En enez Vaz, er Ieodet, ive er Seiz-Enez,

Eur blavez omp bet euruz evel eal Doue.
A setu lec'h pa ho gwelet an oll a lavaret ;
« Setu kloaret ar Rannou, soul evel eur serven,
« Setu Metik, e vestrez, fresq evel eur rosen. »

111

Devez pardon Sant-Herbot, e klevis eur c'helou
En euz beuzet ma c'halon en eur mor a zaelou,
Gant e zad ha gant e mam d'am mestrezik Métik,
E oa choaset d'a bried eur Pagan pinvidic.

Ar pagant ze oa diot hep furnez, hep skiant,
Ne gare war an douar nemet ar gwin ardent
Metik paour, pa e gwele a grene gant ankrez,
Hoguen, he zud oa dallet allas ! gant an danvez !

Mont a riz prim da gwelet neuze da Gerzanton,
Dre ma tostaen, em c'hreiz a grene ma c'halon ;
War dachen ar bourg e son e oa ar biniou,
Tud an eured ha Metik beuzet en e daelou.

Metik, a dreuze a daelou a reaz ouzin eur sel
En eur lavaret, *kouraj, mignon fidel !*
Monet a ra en illis lavaret ra d'ar belek ;
Gwenole eo a garan hag hen vo va fried !

Kouzea raze d'an douar ractal ar ben-heréz,
Ha douguet, eo dioc'h tu euz an iliz er mez.
Dispak en c'hoef, e dillat a dispak e bleo ;
Seplantout a ra beza eun elik paour maro.

Mantret oll gant a glac'har e koueziz d'an daoulin,
En eur grial : O Metik zell a drue ouzin !
Pokat a riz d'he dornik d'he diou chod, d'he c'herc'hen,
O Métik ! Métik ! Métik ! p'hini a garien !

An dissesper en dro din, evet eur mentel blom,
A chassos pell ac'hanon, pell war zu Mene-Hom
Va skiant a zo collet va c'halon a zo ien,
O Métik ! Métik ! Métik ! p'hini a garien !

Eiz de goude, azeet e kreiz koat a Rannou.
War va diou chod a red diou feunteun a zaëlou.
Pa glevis e Remengol o zon anter noz,
E lavariz esklamet : « Va Doue deoc'h bennoz.

« O Gwerc'hes vad Remengol, selit ouz va glac'har.
« Amant oun deud da vervel breman war ho touar ;
« Varc'hoaz, ba savo an eol arc'hantet en envou,
« Dindan ar derven goz me a vo cavet maro !,,

« O Metik, va douzik koant, p'hini a garien,
« Kenavo larant did er bed man da viken

« Gant ar maro unanet ni c'hoas en em garo,
« Kenavo er barados, kenavo, kenavo !!!...

IV

An de varlec'h da sav eol, eun durzunel hep par,
A hirvoude en derven he c'hlemou a glac'har ;
Ar c'hloarek a oa maro gant an anken
En eur lavaret *Metik ! te p'hini a garien !*

Ar c'hloarek paour a starde c'hoas a vuzellou
Kroas aour ableo du Metik glebiet gant e zaëllou,
War an derven doa skrivet hano e garante,
Aa diou galon unanet treuzet gant eur c'hleve,

Kasset oa bet ar c'hloarek da vered Remengol,
Pa sebeliet e dishoel iliz zakr *Remed oll !*
Illiz patronez he vam he deuz bet ken karet,
Tud iouanq a Vreiz-Izel, pedid vithan bepret.

Setu eta Gwenole en e wele douar !!!
Eur miz goude eo klevet hanadou glac'har...
Eur plac'hik gwisket en du en bered Remengol,
Dont di da bedi Doue ha Guerc'hes Remed oll

O nemen dre ar vered, velas var eur men be,
Skrivet neve flamm hanou e mignon Gwenole,
Epad an nos daoulinnet, Metik wele dourek,
Hamar men be e poke, e poke kaloneq.

« O Gwenole emezi, setu te en repos
« En douar zakr Remengol, ez out deut d'am gortoz
« Me ken ma strado an de o ma muia karet.
« Er be man, dre zorn Doue, ni vezo unanet !!!

Da sav heol, eur bellec kos, vont da bedi Doue,
He c'havas anter varo gourveet war ar men be ;
Rei a raz d'ar plac'hik paour absolver a pardon,
Metik varvaz laouen, raktal gant ran kalon !...

En eur vogeden ezans ene gwen Metik kez,
Vel eur goulmik a nijaz d'an ev gant an aëlez ;
Euz a Varados Doue eur goarent arc'hantet,
War a tour illiz Remengol, neuze zo diskennet.

War ar goabren ar Werc'hes ha Sent kos Breiz-Izel
Deus kurunen Gwenole, hac e vestres santel ;
Barzet an amzer goechal, drant war e solennou
Da zoue, en Brezonnek, e gane he gwerziou,

Sebeliet he korf Metik, kichen koat Gwenole,
Ar maro deuz unanet an eil gant eguile.
Eur c'hloarek kerantezuz deuz var o be skrivet,
Ar c'homzo truezuz man, gant e zaëlou mesket.

« *Aman repos en peoc'h kloarek Coat a Rannou*
« *Den a seiz hag a galon, den a garie er vro ;*
« *En e gichen eo kousket penn-heréz Kerzanton,*
« *Metik an elik Doue, maro gant rann galon !!!*

O Guerc'hes vad Remengol, setu o taou buguel
Kousket en tall oc'h illiz ha dindan ho askel
Vel eur vam kerantezuz war gavel mabik ;
C'houi dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!

Kleir, ougrou Remengol, truezuz c'hui sono ;
Barset a pelérinet, daelou c'hui a skuillo,
War be Metik Gwenole, pa refet ho peden,
Eur beden a garante a carguet a anken ?

Bevit en doujanç Doue, tud iaouank Breiz-Izel,
Pedit Gwerc'hes Remengol, evit ma viot santel ;
Sonjit ive e Metik, sonjet e Gwenole,
Bezit evel the fidel an eil d'eguile.

HISTOR ADMIRABL

DEMEUZ

AR BOUDEDEO

Pehini abaoe maro hor Zalver, ne ra nemet bale nos ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalamour d'an effronteri an devoa bet en andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa voa o vont d'ar maro a falvezas dezan disquiza var e stal, hac e teuas d'en rebuti evel eur scelerat.

Var ton : **Guerz Santez Anna**

Asistantet enorabl, tostaït da glevet
Ar vuez pitoyapla a voe biscoas ar bed ;
An histor zo truezus demeus ar Boudedeo.
A zo nôs-deiz o' vale aboe hor Zalve maro.

Eus a tribu Nephtali, a guêr Jérusalem,
Voa ganet Absarius, carguet a anathem ;
Dont a ras ar bed—ma en amzer Herodes,
A felveas massacri Jesus, Mab ar Verc'hez.

Va zad a voa ur c'halve, va mam kemenez,
Hac a laboure en temple da ober broderez ;
Ha va c'herent am desqas da lenn leor al lezen,
Hac hini ar Brofetet ivez a dra certain.

Goude e voen demeet gant va c'hereat afin,
Da eur vreg fur a prudant a tribu Benjamin,
A binim boe tri buguel en amzer ma teuas
Autrou Sant Yan Badezour d'annonç ar Messias,

Sant Yan a gonvertissas calz eus ar bayanet
Pere voa idolatret, caledet er pec'het :
Dec mil den en eun devez en deveus badeet,
Me, va greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : va fried emezi,
Lekomb en em vadezi, enont e ar Messi ;
Ha me o respont dezi gant un ear direspect :
Na ni nac hor bugale ne vimp qet badeet.

Aben eun nebeut goude Sant Yan voe dibennet
Dre urz roue Herodes, eun den cruel meurbet,
Ha ma teuas hor Zalver evit rên en e blaç ;
Hac a ras dre ar c'hanton calz a viraclou bras.

Clêvet e meus bet Jesus alies o sermon,
Hep ne meus bet profitet eus e bredication ;
Va-unan e voa presant p'en doa rassaziet
Dec mil den gant bemb para ha goudeze pesquet.

Me Boudedeo malëurus a velas c'hoas souden
Jesus o ressucita Lazar, breur Madalen,
Ha gûelet dibossedi calz a dud possedet,
Ha sivoas din pec'her bras, ne meus tam profitet.

A ben eun nebeut Goude voe Jesus kemeret
Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,
Ha condaonet gant Pilat da rancout da zouguen
Ar groas pouner ha mezus evit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, hor Zalver voe samet,
Da vont da venez Calvar da vea crucifiet :
O velet an dud o redeç, me guemer va buguel,
Ha me mont da dal an nôr pa yê en da vervel.

Cetu Jesus o tremen neuze abiou va zi,
Pehini en tal va stal a deu da reposi,
Ha me lavarat dean gant eur gomz arrogant
Qê alesse euz va stal, te zo eun den mechant.

Ganes on dizenoret gant da ifronteri.
Pa quêlân o Reposi amân e tal va zi ;
Querz alesse, den ingrat, cos sorcer milliguet,
Querz alesse d'ar maro pe c'heus he meritet.

Jesus a resbontas din gant eur voez truezus :
Mont a ran da bartia, den fall, den maleürus,
Me riposo gant va Zad, te valeo bepret
Dre bêvar c'horn ar bed—mâ ac'han da fin ar bed.

Ia, te veleo, ac'han dar jujamant,
Hac er c'hoste deo d'am Zad am velo suramaant
O varni ar bec'herien pere voa condaonet
Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüset.

Pa glêvis comzou Jesus, va c'halon voa touchet,
Ha me rêi vo bugale eun instant d'am pried,
Ma velis ar Veronic o sec'hi bisach Jesus.
Ha chom en he mouchouer e boltret truezus.

He ellout n'em arrêti e heuillis hor Zalver.
Hac e velis va Jesus ha calz graguez santel :
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret :
Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staguet.

P'am boe guelet hor Zalver o vervel var ar groas
E creiz etre an daou laer carguet a boanniou bras,
Ha me commença va beach gant calz euz a anquen
O tont da laret adieu da guêr Jerusalem.

Sonjit eta, Bretonnet, peguement a c'hlac'har
En deus ar Boudedeo bremâ var an douar !
Rancout quitted e gartier, e vreg, e vagale,
Hep qimiadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nomb a vlaveziou,
Ec'èruas en Ejipt, pel bras demeus e vrô,
Eno e mâ ar Mor-Rus, elec'h m'oe tremenet
Moyses gant pobl Doue, hep cavout drouc ebet.

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,
Elec'h emedi en noas an dud a zo enni :
Eno e velis eun tad o trec'hi a damou
E verc'h evit sacrificiç da rêi d'o doueou.

Mont a ris da Malhodo, e pelec'h eus tud drol,
Pere a ador Doue hac an diaoulou oll ;
Pedi reont Doue da gaout prosperite,
Hac an diaoul a bedont ne raï qet drouc dèze.

Guelet e meas er Japon ur vam meurbet cruel,
Aini'deusas da laza, sivoas, e daou buguel.
Er vro-ze e permettet laza ar bugale
Pa n'o deus quiet a vara da rêi dèze.

Goude'quemeras an hent da vont d'an Enezi,
D'an Americ, d'An Asi, ha neuze d'an Turki
Ar graguez eus var vro-se a vale d'an arme,
Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da laza ar botret,
Nemet unan dre famill ne ve james miret.
Be'o deus eur rouanez a ro commandamant
Da laza an oll botret, hep caout de nep damant

Er guær eus a Garniol eus ur c'his drol meurbet
Rac eno an ded yaouanc, pa vezont eureujet,
E ranco ar vreg yaouanc, nos qenta e heured,
Mont da gousquet gant ar prinç, vit beo enoret,

Bet on ebars eur c'hoad hanvet Cisaria,
Elec'h ma eller bale cant leo d'an neubeuta
Hep cavet dour da eva, na feunteun, na rivier,
Ar pez zo goal incomod da oll dud ar c'hartier.

Monet a pis c'hoas pelloc'h d'ar guær a Vosopa
Pini zo eus he divoal eur prinç eus an drola :
Ur vanden chaç a merc'het en deus evit gardou,
Ha n'en deus qen sourdadet evit difen e vro.

Ac'hane'yis da eur guær zo hanvet Estopet
Elec'h ma zeus serpentet ha loened vil meurbet
Zo qer teo ha corf un den sur ma vent muzuret
O deveus d'an nebeuta daou-uguent troated het

Et spaç demeus a gant vloas ez on bet o vale.
Ha me eruont adare em bro hac em c'hontre ;
Allas ! maro voa va greg coulz ha va bugale,
Ha den ebet eus va bro certain n'ain anavee.

Neuze e teuis da Rom, ebars en Itali,
En amzer-ze e voa calz eus a c'hlac'har enni ;
Guelet'ris marzeria nombr bras a gristenien,
En defot ne renoncent d'o feiz ha do lezen.

Me a vale ar mor coulz ha var an douar,
Ha me partiel neuze evit ar Franc, bro rar?

E Marseil, Bourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon
Ach'ane da Vreiz-Izel, d'ar guær vrao a Roazon.

Guelet e meus Montroulez ne voa nemet eur c'hoad
Ha guelet Brest ha Qemper ebars en douar prat
Ha guelet ar gær a Is en e frosperite,
Hac ar gær a Lexovi a meus guelet ive.

Guelet e meus Breiz-Izel en coad ha menezou,
Ma zoat evel sovajet nevze ebars er vro ;
Me a vel calz a guæriou er vro-se batisset,
A ra calz a chenhamant abaoe ma zon bet.

Me vel ar guær a Roazon eur guær gær batisset
Dol, Guenet a Sant-Malo, Dinan hac an Naonet,
Sant Briec ha Landreguer, Lannion, Montroulez,
Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne ivez.

Ar c'hæriou ze meus guelet e coad hac e prajou
Pa deus d'ober va veach qenta e bars er vro ;
Cetu batisset Qemper, ha Brest ha Recouvranc,
Qemperle, Moelan, Kerahes ebars en assuranc

Anfin, pa on condaonet gant Doue da vale,
Me zo bet en em gavet e creiz meur a arme ;
Canoliou a fusiliou, clezouz, sabrennou,
Netraa ne de-bet capabl de rei din ar maro.

Bet on ebars en listri a zo bet perisset,
Hac an dud a voa enne a meus guelet beuzet,
Ha me hanvet Boudedeo n'en bije drouc ebet
Comzou Doue a ranco bea accomplisset.

Condaonet e zan ganta da chom var an douar ;
Comprenit oll christenien, ema zo din glac'har !
Va zourmanchou er bed-ma biqen na echuo
Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp goennec so em godel bepred
James ganet nep seurt clenvet me ne don attaquet
Bet on ebars en broyou elec'h m'oa ar vocen,
Hep na zeus staguet ouzin na clenvet nac anqen.

Va boutou na va dillat james na uzont qet,
Dre bermission Doue a meus bet offancet ;
Peder guæc'h a meus redet pevar horn ar bed-ma,
Ha guelet e meus ive calz chenhamant enna.

Brema e zon comancet da redeç a bemp,
Hep ne don ambarasset gant dibri na cousquet ;
Guelet a meus bet broyou zo bett oll revinet
Ha calz demeus a guærou gant ar gurun devet.

Ne meus pet calz amzer evit chom da barlant
Me a gred e ma va zreïd vargore glaou ardant,
Nan, ne zeus nemet Doue a elfe discleria
Ar boanniou bras a souffran qerqent ma reposan.

Pebes maleur e din-me bea bet rebutet
Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bed
Pa voa o vont d'ar maro, da zon da zisquiza
Ha me neuze dre dre valeur a zeuas d'e zispriza.

Ema e ar maleur bras a meus var ar bed-ma !
Emon atao o vale euspen trivarc'h hant vla,
Ha c'hoas e ranqan bale ac'hen da fin ar bed :
Pedit Doue evidon, ma zin d'ar joaüstet,